

Ur ger a-raok

An notennoù a gavor el levrig-mañ – ma tichañs dezhañ bezañ embannet, ha n'on ket diarvar c'hoazh diwar-benn kement-se bremañ, pa skrivan ar rakger-mañ – an notennoù-se, neuze, a zo bet savet gant un den anvet Herry Goulard. Anavezet em eus anezhañ – ken un tammig bihan avat. Sed penaos em boa graet anaoudegezh gantañ : e-pad un dek vloaz bennak en deus bet graet, amañ, e Sant-Brieg, war-dro ur strolladig tud war an oad hag a glaske adperc'hennañ ar yezh a oa bet hini o bloavezhioù kentañ, ur yezh hag a oa bet peuzankounac'haet gant lod anezho. D'ar c'houlz-se e roen-me kentelioù brezhoneg e *kreizenn Sevenadurel Vreizhek Abherve*, ha pedet em boa an Herry-se, meur a wech, da zont da'm c'hentelioù, evit kaozeal gant va skolidi, dezho da glevet ar brezhoneg difestur ha saourus a deue gant Herry, ganet ha maget ma oa bet e Boulvriag, en ur mare ma oa ar brezhoneg yezh an holl er barrez-se, damdost da Wengamp.

Skrivañ amañ e savas mignoniezh etrezomp a vefe, moarvat, mont re bell ganti. Ar santimant am stage outañ a oa tostoc'h d'an istim ha d'an doujañs. Un den sioul e oa Herry, ha peurdremenet en deus e amzer e-unan-penn e porzh al Lege, o taremprediñ un dornadig tud hepken. Bevañ en distro a felle dezhañ ober, ha tañva douster an digenvez a oa bet, a-bell-gozh, e youl galonekañ. Pa varvas, e verc'h a deuas da'm gwelet. Kavet he doa,

e-touesk paperioù he zad, un teul, ennañ notennoù bet savet e brezhoneg. War golo an doug-dielloù e oa dastumet an notennoù ennañ, en doa skrivet Herry un titl e lizherennoù tev : **Renabl peuzhollek an netraigoù**. Dindan an titl e oa ur meneg bet savet evidon. E berr gomzoù e c'houlenne diganin mont e darempred gant un ti-embann brezhonek evit ma vije moulllet e zornskrid.

Kaset em eus an notennoù-se – un 300 bennak a zo anezho – dres evel ma oant, hep kemm tra ebet enno, da diez-embann, ha, da c'hortoz ken na vo graet lavaroù diwezhañ Herry, e trugarekaan en a-raok an embanner a deurvezo lakaat da zont er-maez, e stumm ul levr, an *netraigoù-se*.

Herve Gouedard
D'ar 15 a viz Ebrel 2022

Dornskrid Herry Goulard

Renabl peuzhollek an netraigoù

Va mennad, er pajennoù a ginnigan hiziv d'al lenner gant al levrig-mañ, a zo bet dastum bruzun munut an deizioù ha serriñ an netraigoù e vezan test anezho em endro pemdeziek. Bevennet strizh a-walc'h eo an endro-se, rak me a zo o vevañ e porzh al Lege, damdost da Sant-Brieg, hag o vezañ ma ne 'm eus ket a garr-tan, ne bellaan ket nemeur diouzh ar porzh : ar c'haeoù, al lenn-borzh, an traezhennoù betek beg ar Rozeler pe betek groa Langaeg, an div draoñienn, hini ar Goued hag hini ar Gouedig, ha kreiz-kêr Sant-Brieg, sed an harzoù m'en em astenn va dister a veli etrezo. Gwech ha gwech all, koulskoude, e ran un achapadenn bennak betek ur bourk diamen bennak, gant ar c'harr-boutin. Daoust d'ar bed-se bezañ bihan-bihan em eus merzhet a-bell-gozh e c'hallan, diwar doull-dor va zi koulz lâret, renabliñ un niver dreiskont a fedoù. Gant teurel evezh en deus pep hini ac'hanomp bemdez, dirak e zaoulagad, un diniver a skeudennoù hag a ro dezhañ un tañva eus an didermen. Tostaat d'an didermen-se dre draoù boas ha dister – hogen daoust hag ez eus traoù dister, e gwirionez ? – sede kement am eus klasket ober. Alese titl al levr : *renabl peuzhollek an netraigoù*.

Evit ma vefe aesoc'h ha plijusoc'h al lennadenn, em eus graet va soñj da niverenniñ ar pennadoù ha da

venegiñ, amañ-dindan, dre ur ger berr, un toullad gerioù pe ur frazenn, an danvez a vezo kavet er pennad-mañ-pennad. Ar pennadoù-se n'eus a-hend-all tamm urzh ebet enno, na kronologel na tematek, hag al levr a c'hall bezañ digoret, hervez youl ha froudennoù al lenner, war n'eus forzh peseurt pajenn.

Herry Goulard

g. s : a-raok reiñ da lenn va notennoù din-me, e vefen eürus ma teurvezfe al lenner teurel ur sell, amañ-dindan, war an arroudennoù lennegel ez on bet awenet ganto, ar re ez eo bet, ma c'hallan lavaret, sturiet va labour ganto. An arroudennoù-se eo o deus lakaet da ziwan ennon ar mennad da sevel ar “renabl” a vo kavet pelloc'h :

Soñj mat am eus dalc'het eus an abardaez diwezhañ el lanneg vras war lein Krec'h Elies. Na pegen stag e oan ouzh netraigoù am boa gwelet ha klevet kant ha mil gwech hep ober fed outo.

(Jarl Priel, skrivagner brezhonek tregeriat, XX^{vet} kantved)

A-hed va eurvezhioù arouarek, adal ar beure betek an noz, em sav dirak va skritoer, e lakaan war ar paper, diratozh-kaer, an netraigoù a dremen o dassked berrbad dre va soñj. Iskisat rambreoù !

(Urabe Kenkô, manac'h japanat, XIII^{vet} kantved)

Pell zo bremañ em eus kemeret ar pleg da skrivañ [...] darvoudoù bras ha bihan va buhez pemdeziek, an amzer a

*ra, treuzfurmadurioù va liorzh, an dud a deu da'm gwelet,
troioù-kamm ha souezhadennoù kaer ar blanedenn. E
c'heller lavaret ez eo un deizlevr, evel-just, hogen ne bledan
morse ennañ ganin-me va-unan, gant kement a zo tro-dro
din avat ne lavaran ket.*

(Michel Tournier, skrivagner gall, XX^{vet} kantved)

*Arvest ar straedoù a zo evitañ, war ar memes tro, studi
ha plijadur.*

(Pêr-Jakez Helias, skrivagner breizhek, XX^{vet} kantved)

1. Beajour difiñv (gwelet ivez nv 300)

Sul, gouel, bemdez, pa vez uhel ar mor, ez a an den war droad betek penn al lenn-borzh, du-hont, el lec'h m'emañ ar skluz. E valeadenn vuiañ karet an hini eo. Un hantereurvezh evit mont, war e nañv, penn-da-benn gant al lenn-borzh, dre ur wenodenn stultennus, ha kemend-all evit dont en-dro d'ar gêr, dre ar c'haeoù, en tu all eus an dour. Etre an div valeadenn e chom an den war vord an dour da sellet ouzh ar bagoù o tont d'an aod pe o kuitaat ar porzh. Gwech ez eo bagoù-pesketa bihan ha postek o toc'hellat, gwech bagoù dre-lien, skañv ha mistr, hag uhel o gwernioù. Ar pezh a blij dezhañ dreist pep tra avat eo gwelet al listri-karg oc'h embreger. N'eo ket sorc'hennet an den gant ar beajoù pell, padal an anvioù a lenn ouzh kouc'h al listri-karg-se a zihun ennañ hunvreoù kozh.

Neuze e vez en e c'henoù blaz c'hwerv un n'oun doare petra hag a c'hall, a-wechoù, bezañ displijus, dreist-holl pa wel al lestr-karg o pellaat en ur lezel war e lerc'h ur roudenn hag a ya he gwagennoùigoù eonennek war ledanaat...

2. Un i bras (gwelet ivez nv 235)

Un eur diouzh ar mintin. Un taol-lagad dre ar prenestr. Du-hont, en tu all d'al lenn-borzh, uhel en oabl, ar c'hann-loar dreist krec'hiennoù Saozon. Ken splann he sklaerded ma c'hallfer kontañ an delioù er gwez. Ac'hann

da bell en em gavo al loar, en he redadenn digavandenn, a-us da dour an iliz. Neuze e vezo gwelet evel un i bras ouzh skramm an neñvoù.

3. Martolod a-bell-vro

Ul lestr-karg alaman eo. Marilhet eo e Hamburg. En em gavet eo er porzh e-kerzh an noz, gant al lanv. Kaeet eo bremañ, ha diskuizhañ a ra, ponner, e freskijenn ur beurevezh ailhennus. War an aros anezhañ ez eus daou vartolod helmoet ouzh al listenn. O gwelet a ran mat dre brenestr va c'hegin. Butuniñ a reont en ur c'hortoz, moarvat, ken na stago al labour diskargañ. An daou vartolod-se ne welint eus kêr Sant-Brieg nemet nebeut a dra. Ur porzh, p'en em soñjer ervat, a zo ur porzh, na mui, na maez : skluzioù, kaeoù libistret o lufrañ gant al litenn, givri-houarn, etrepaouezioù hir hag uhel, ur renkennad tiez o zalbennoù louet, ha dour du al lenn-borzh d'ur beurevezh mougennet a viz Kerzu. Unan eus an daou vartolod, koulskoude, a daolo pled ouzh ar c'hrec'hioù gwezennek, en tu all d'an dour, hag a chomo da rambreal pa gejo e selloù gant un ti bras neizhiet er c'hlasvezh, hag harp e gein gantañ ouzh ar roz : sachet e vo e evezh gant ur prenestr sklêrijennet. Soñjal a raio dezhañ, marteze, na pegen klet ha plijus e tle bezañ e-barzh an ti-se, gant frond ar c'hafé tomm ha monedoneoù dibres ur vaouez...

Sed kement a deuio d'e soñj en-dro, bloavezhioù goude, pa zistago unan bennak dirazañ an anv-se, hag a son ken iskis d'e skouarn : *Sant-Brieg*...

4. Ar voualc’h hag ar velc’hwedenn-grogennek

E-kreiz an hent a ya penn-da-benn gant ar stêr, un tad-moualc’h, du-pod e bluñv. Derc’hel a ra en e veg ur velc’hwedenn-grogennek. Evit terriñ ar grogen ha tapout debriñ ar c’hig a zo enni, e stok anezhi ouzh an douar, a daolioù pigos prim ha taer. Honnezh eo lezenn ar bed-mañ : debriñ ha bezañ debret. Emañ ar voualc’h a-zevri gant he labour, ha ken marnaoniet an tamm anezhi moarvat, ma ne ra van ouzh va gwelet o tremen hebiou dezhi.

5. Ar c’hwil

Ur c’hwil war lez an hent. Dispakañ a ra e feureskell. A-daol-trumm avat ur sourrad avel-dro, ha setu an amprevan war e c’hwen. Lavigat a ra e bivioù du hag e dastornelloù hir ha moan, met n’eo ket evit adsevel. Gant beg va disglavier ec’h adlakaan anezhañ war e bivioù hag e vountan anezhañ pelloc’h, en ur bouchad geot druz, da viret na vefe flastret gant ur baleer dievezh.

6. Ar stêr

Kaouadoù glav-arnev a zo disac’het trumm war ar porzh hag ar maezioù tro-war-dro. Ar stêr eo kreñv an dour enni, un dour lous, brun-du, karget a liñvaj a bep seurt : douar, grouan, traezh, lec’hid, brankoù marv mesk-ha-mesk. Ret e vo gortoz un toullad devezhioù siouloc’h, evel kustum, kent d’an dour sklaeraat un tammig.

7. Ar gedour

Sant-Brieg, d'ur beurevezh a viz Even. Abred eo c'hoazh, hag ar straedoù didrouz n'eus den ebet enno. Kludet war ur pinakl, war lein an ti-post, un oriaev digavandenn ha balc'h, gedour difiñv, a vale e selloù aketus war doennoù kêr.

8. Mimoza

Miz Genver e Sant-Brieg. Ar bodoù mimoza kentañ o vleuñviñ ouzh diribin an dorgenn, tro-dro da chapel gozh an Diskuizh-Mat. Pell a zo c'hoazh da c'hortoz ac'hann d'an nevezamzer avat !

9. Un deiz a vo

Chomet eo an den a-sav, evel boaz : bemdez-buhez, pa ziskenn war-droad gant ar straed a gas eus kreiz-kêr Sant-Brieg d'ar porzh-mor, e ra un ehan en ur pleg eus an hent, atav an hevelep hini. Ac'hane e tap ar gwel pell-pell war an draoñienn, tre betek ar c'hrouzelloù togn a weler er c'hornôg, en tu-hont d'ar vengleuz c'hrouan, hag a zo gwir harzoù Plerin. Kaeroc'h taol-lagad war ar c'hontre ne c'hall ket bezañ, gant tachadennoù marellet ar parkeier ouzh tor ar roz hag ar c'hleuziadoù lann ha drez ; amañ-ahont, bochadoù derv pe onn, pe c'hoazh tolzenn ur c'hoad-pin, glas hañv-goañv, o c'holojiñ un dinaouenn. E deun an draoñienn, setu ar Goued o kammigellat en ur sourral dre-douesk ar pradeier, hag o ruilhal e zoureier fresk etrezek ar mor, gwech sioul hag habask, gwechoù all herrek avat, e-giz pa vije droug ennañ.